




U
A




Y. Miossec
er Martinik
hag er
stadou-unanet



Kristian
Brisson :
Lapous
an donvor



Daou
respont
da
varr-heol



N
E

N° 16

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 16 — EVEN-GOUERE 1978

Rener : Andreo Merser
Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 12 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 50 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 60 lur
- studierien, soudarded : 30 lur
- liseaned : hanter-briz, 25 lur
- broiou estrañjour : 60 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war ano P.-M. Mevel, C.C.P. 1499-55
Roazon.

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : Kenta trimiziad 1978.

C.P.P.A.P. : n° 34.627.

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin,
le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an
aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emañ ket
da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet
anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

- H. Gaudart : Hunvre a loar : faltazi	P. 2
- Fanch Danno : Koumoul	P. 3
- Ar Stourmer : Harlu	P. 5
- Kristian Brisson : Lapous an donvor	P. 6
- Y. Miossec : Dreist ar mor braz : IV	P. 13
- Anna-Mari Arzur : Brezoneg 'vez desket er skol ive	P. 21
- Naig Rozmor : Eun tammig chach-bleo diwar-benn eur varmedigez	P. 25
- J. Rannou : Eur respont all da Varr-Heol c'hoaz	P. 28
- P.M. Mevel : Y. Miossec er Stadou-Unanet : eul lagad lemm hag eun tamm fent ..	P. 31

Huñvre a loar Faltazi

*War al loar e kerzen,
pe, kentoh, e lammen,
goustadig, didrouzig.*

*Hag ar stered ' skede
en neñv teñval ponner.
Flour ha blod oa 'n douar,*

*ha dindan va hammed
' save eur goumoulenn
a huchenn (1) arhantet.*

*Med, strinket em-hichenn
eur skeudenn vraz boemuz
am goloas a spont.*

*Edo ar memez aon,
- ha me ken yaouankig ! -
am lake da vond gwan.*

*« Yann gand-e-forhad-lann
prest atao da skrapa
bugaligou disent,*

*beva ' rit 'ta 'leh all
eged e faltaziou
aonig ar vugale vihan ? »*

*C'hoarzin ' ree atao,
goapauz, foñgn (2), divalo,
dindan e dokad lann :*

*« Setu eur gaoz souezuz...
Emaon en hoh huñvre
aloubéréz diskiant ! »*

*Med en eur zihuni,
e-touez va bleo fuillet
eun draen am-eus kavet,*

*ha stag ouz va botez,
goustadig, 'lugerne
poutr arhantet al loar.*

H. GAUDART.
25.08.77

huchenn = poultr
foñgn = droug

Koumoul

*Koumoul en oabl, skañv evel pluñv,
Gand o mil skeudenn, koant ha kuñv,
Pe sklerijennet toud e ruz,
Evelse am eus o gwelet.*

*Med goude, pa skoachont an heol,
E skuillont glao, grizil hag erh.
Da vouga din va levez
E teu koumoul re aliez !*

*Bremañ o gwelan en daou stumm,
Koant ha lirin pe vil ha du,
Med forz petra 'm-bez en em fenn
War va hent vez eur goumoulenn !*

*Ar garantez oa evidon
Levez vraz pe boan galon,
Koroll ha kan war bep seurt ton.
Evelse 'm eus he gwelet.*

*Med kemmet eo bremañ an traou.
Sioulloh or halon, 'tre on daou,
N'eus na fals promesou na gaou.
Or harantez zo distanet.*

Bremañ e welan, a beb eil,
Ar garantez : kemer ha rei.
Med kaer 'm-bez ober, en em fenn
A zo c'hoaz meur a goumoulenn !

Ar vuez zo bet evidon
Spi ha kerse, trubuil ha doan,
Huñvre ha berz, labour ha poan.
Evelse am eus he bevet.

Gwechou e soñjan, memestra,
Soursial re ne dalv netra !
Gwelloc'h eo c'hoarzin ha beva
Eüruz gand e oll vignoned.

Bremañ e welan n'eo ket drol.
Ar vuez zo gonid ha koll;
Med kaer 'm-bez ober, en em fenn,
Tremen ra 'vel eur goumoulenn !

Fanch DANNO.

Diwar ar ganaouenn " From both sides now " (Mitchel)

Harlu

*Dindan koumoul miz du
Dindan an oabl griz-du
Herreg ruill ar marh-du.*

*Trezeg 'r banleviou griz
Repu va henvroiz
Herreg ruill ar marh-griz.*

*An treñ a red dilu
A-hed hent an harlu
Dindan oabl griz miz du.*

*An treñ du dishual
A ruill trezeg Bro-Hall
Dindan an amzer fall.*

*Pegen trist an harlu
Dindan oabl griz miz du
Va-un barz ar marh-du.*

O vond da Bariz d'an 8 a viz du 1977.
AR STOURMER.

Lapous an donvor (*)

Piou eo ar pôtr yaouank o kantreal war al lehidennou ? Flamina ra e vleo gand ruzder ar huz-heol. War a zeblant, emañ o klask eun dra bennag rag sellad a ra tro-ha-tro ouz an trêz hag ouz an dremmwel evel pa vije o hortoz eur respont diganto.

A-hont, pell-pell, an heol a zo hanter drebet e gelh gand linenn ar mor. Treuzet eo gand e vannou relegenn eur vag o pezellâd war he skorou.

Ha neuze, dihortoz kaer, e klevan kri klemmvanuz gouelan an donvor. Gweled a ran anezañ o sevel en oabl a dôliou askell gorreg, espar e stumm ouz kein an heol.

Med, peleh bennag emañ an neuz a welen ergentaou o vale warzug an ehonderiou ? Klask a ran anezi, an aner. Ha brellet eo va spered ? Chom a ran a-zav gand ar stênet ma 'z on, stag va zellou ouz al lapous pa n' eus gour nemetañ e-kreiz an divent.

Hogen, a-nebeudou, e verzan eur birvill-moueziou tano, trouziou damvouget a zo krog al lehidennou da zasseni ganto. Lufrennaoui ra an dour en eur hounid an tachennoù du ha glaz. Sevel a ra an êzenn-vor; emañ krog al lano.

* Kristian Brisson, kenta priz Per Trepos er genstrivadeg bet savet gand FR3 e-neus bet ar valeded da rei deom aotre d'embann an danevell he-deus talvezet dezañ kaoud e briz. Trugarez dezañ, hag o gourhemennou.

Neuze e teuas lapous an donvor war bouez eur barrad avel...

Tarz an deiz oa anezi. Hag an heol da skuilla e wrez a-buill er gambr dre doull ar prenestr digor. Tomma reas e gorr skuiz da Dreveur tra ma tistane an êzenn-vor e benn brevet gand ar boan. O paouez dihuni edo ha strani rê c'hoaz war e spered eñvor ampiz e hun diweza.

A-greiz-oil e skrijas gand ar zofij anezañ. Eun droug ruz a oa bet stravuillet e gousk gantañ. Ganet e oe gand e boan dindan stumm eul loen euzuz re-bar d'eur givnidenn braz-spontuz o spia warnañ. Ha kaer e-noa stourm evid kas anezi diwar e dro, anad e oa dezañ ne vije ket treh warni. A-benn-ar-fin, pa 'n em gavas dinerz ar pôtr, e krogas an euzvil da doulla dezañ e glopenn, digas ha dizehan. Hag ar grignerez a lakê anezañ da sponta. Kemend ha ken bihan ken e lôskas eur youhadenn.

'Peta 'zo, mab ? Stouet a-uz da wela ar pôtr kêz, edo ar vamm o klask skarza e doan a-ziwar spered he mab. Esêt e oe dezañ eun tammig hag e vanas morgousket.

Edo ar voliji o skei hag o tarhei, diskrog ma oant gand ar gortventenn.

Gand an deiz nevez e teuas tre beteg ennañ trouziou ar bed. O digemer a reas Treveur evel m'e-noa o digemeret a-viskoaz, digor e galon d'o hud.

" Treveur ! Pleh an diaoul emañ 'lakepod-se adarre ! "

Den n'e-nije gelllet e gavoud, kuzet brao ma oa a-dreg eur mell roh, war ar garreg. Tamolodet eno, gwalhet e benn gand an avelioug hag ar fru, chom a rê eurvezioù-pad en e guziadell pa veze an tre gand ar mor.

Ha tra ma spurmante an dremmwel, en em houlen a rê outañ e-unan :

" Petra 'zo en tu all d'al linenn-ze ? " Hag e 'faltazi a yê endro, peogwir ne grede ked goulenn eur respont digand an dud vraz - re zipituz eo o respontchou. Er skol, avad, e oe displeget dezañ e doare traou ijinuz, ya, med ken dipituz an eil re hag ar re all.

Setu perag ne skuize ket o heulia nijadenn al lapous-mor gand sellou atao renevezet, ha birvi rê gand ar hoant da vond d'e heul pa steuze er pellder, a-hont, en

ehonder. Luskellet e veze e huñvre gand kilredenn an houl er poullouigou, kruz an tonnou e traoñ an tornaod. Dond a rê beteg ennañ frond yahuz ar bezinou dizolo. Ha p' edo en e zav e-touez ar strinkadennou, neuze 'helle tañva war e vuzellou kraz blaz hollen ar gouele-dou.

Eun deiz, p' edo 'vond d'ar gêr euz an ôd en eur vezella etre e vizied eun tamm bezin glaz, e klaskas kompren perag e trivlie e voud dirag splannder ar bed. Petra 'oa erfin kaerder ar bed ? Skeud ar Gened ? Hag ar Gened he-unan ? Daoust ha ne oa ket eur skeud ? Skeud eur bed all ? Med, daoust ha peleh edo an nor a zigore war ar bed-se ?

“ Sell ' ta ! Stlabezet toud al leur-zi ganez ! ”

Edo an tammou bezin a-streo evel eun huñvre freuzet.

“ 'Dal ket boan din kempenn an ti gand ar penn brell 'zo ahanout ! ”

Heulia rê e zaoulagad lijennet troidell foll ar paillou-rennou aour e sked an heol heñvel ouz troidell foll e zoñjou trubuillet. Soñjou ha ne oa diouto ken nemed bruznachou an amzer dremenet.

Ha pa grogas eur gaouad poan ruz ennañ, lamm diroll e galon a lakeas en e henou blaz an enkreuz.

Dond a reas da gluda war bord ar prenestr...

Kreizteiz oa anezi. Ne oa euz toull ar prenestr nemed eun dachenn hlaz treuzet a vare da vare gand bomm-nij eur stumm, tra ken. Beva rê Treveur en eur bed ne oa dioutañ nemed stummou o tond war wel hag o steuzi ken buan all. Ne oa ken euz an amzer. Treuzet e veze e spered hag e weled gand soñjou ha neuziou ne helle ked o 'faka pa ne oa dalh ebed enno.

Pa zonas kreizteiz avad, e teuas soñj dezañ euz traou koz. Ya, traou koz e oant hag êt da eñvorennoù dispi.

Kreizteiz e oa ive pa 'noa grêt anaoudegez ganti e Pont-Minaoued. Edo ar plah war ar pont koz, drebet ar vein anezañ gand ar man hag an ilio. Selled a rê ouz ar red-dour a virville gand nerz al lano. Stravuillet e oa an dour gand e gildroidad e-touez al lehidennou. Ha ken stravuillet all e oent o-daou p' en em weljont.

Eno e tiwanas en o hreiz eur gellidenn dener a rankfe

beza trohet a-veh deut d'he ment. Eno e strinkas diouz o halon eul luskadenn dispar a-unan gand froud ar mor. Eno en em veskas hag e kendeuzas mouskan ar stêr ha mouskomz o moueziou lent.

Mond a reas kalon Blodwen vihan en he hreiz pa baras warni sellou ar pôtr yaouank. Skedi rê en e benn daoulagad leun a velkoni hag a vamez war eun dro ken e oe-hi tizet da vad.

Ma oe dremm kevrinuz Treveur eur gudenn eviti, evitañ avad, ne oe kudenn ebed. Evel ma par an heol war an trêzennou, para rê oll deneredigez mab-den war dremm ken flour ar goantenn. Evel ma tiskenn dousig ar valafenn war galonenn ar vleunienn, poka rê d'he divoh kuñv gand allazig e henou naoneg. Evel ma trese kentoh war an trêz troellennou e zoñjou kuzeta, trasa rê neuze linenn he diweuz hoaluz gand e ziweuz entanet.

Kredi reas dezañ gweled o steredenni en he bleo ar poultr arhantet hadet gand al loar war ar mor a-hed an nozvezioù misterius.

Ha pa hoarveze gantañ mond war vor, neuze e tamwele e liou an donderiou, liou espar he daoulagad boull.

“ A thing of beauty is joy for ever. ” Ha pa 'nije anavezet ar hrennlavar-ze, daoust hag-eñ vije bet anezañ alhouez an nor a glaske azaleg e vugaleaj ? A-benn-ar fin, petra 'jome e dilere an emgavadennou-ze ? An Ankou-nah ?

Kreizteiz e oa pa 'noa grêt anaoudegez ganti. Noz e oa pa welas anezi evid ar wech diweza, evelato. Daoust ha kompren a reas-hi ne oa ket eun elfenn a velkoni a zañse en e zaoulagad terzienneg ?

Pa oe krog ar boan da drelati e benn da vad, ne 'fellas ked dezañ gweled den ebed ken war e dro, warbouez e vamm... hag e dad. Henez, 'mez soun, ne oa ked gwalle-jalet gand e vab. Ken disheñvel e oant an eil diouz egle ! Peurliesha ne oa ket nehet an tad gand doareou ar mab; koulskoudê, ne oa ket atao treh d'e imor hag e veze komzou ha rebechoù.

Ral a wech e veze wardro ar hlañvour. Petra 'hoarie en e benn pa yeze e-tal e vab tra m'edo skeud an Ankou o henti ar gambriq ?

Huanadi reas Treveur gand ar fêz ma oa. Petra 'vije

antronoz ? Evid ar mare e chome c'hoaz gantañ an dachenn hlaz-se. Glaz e oa e lodenn, yantao. Al lodenn-ze hag a oa anezi toull ar prenestr.

Erru e oa an noz anezi. Serret e oa bet ar prenestr gand ar vamm, rag yudal ha c'hweza rê an avel ken e rê. Du-pod e vije bet e-barz ar gambr anez d'an tan bet c'hwezet en oaled pa oa deut eun tammig freskder gand an abardêz.

Padal, ne zañse war al lein hag ar mogerioù nemed eur skleurenn zister p'edo an tan o vond da vervel. An etivi ne oa ken diouto nemed koad skarnilet a rede c'hoaz warno flammouigou o vond da voged gand eur strakadennig.

Neuze, etre daou varrad poan, e leze Treveur e zoñjou da vond da heul an deiz war e dalarou. Seder e oa e zremm, eun drugar. Sederê e oa p'edo en gortoz. Gortoz petra ? Ne oa ket evid hel lavared. Pez 'zo, eun dra a-bouez e vije, her gouzoud a rê. Ha seul laouennoh-a-ze e oa gand se.

Hogen, gand an noz e stagas adarre e spontadennoù d'ober o reuz. Eur hwezenn stank a bizennas war e dal hag en e gerhenn. O veza ma terme truezuz e teuas e vamm d'azeza e-tal an tan, he stamm ganti war he barlenn. Pa grogas en he labour, kemend hag abuzi amzer, trouz an nadoziou 'n em zilas e penn ar pôtr evel eul laonenn tomm-ruz oh ober he hent beteg tre kreizenn e empenn. Ouzpenn-ze, mone-done ingal momeder an orolaj koz a oa heñvel ouz eur hemend all a dôliou morzol war e glopenn. Ha pa zistigne kerdin ar pouezioù dre ma tremene an eurvezioù e rede en e gorr eur gridienn euzuz. Ergentaou e oa bet e dad er gambr evid sevel e bouezioù d'an orolaj. Leuskel e-noa grêt Treveur eur gunuhenn vantruz pa glevas gwigour ar roudaoueg merglet.

Pa zonas deg eur ez eas kuit ar vamm goude beza poket flourig da dal he mab, tres warnañ da veza kavet eun tamm renoz. A-douez e vorgousk e klevas Treveur chuchumuchu a-dreg an nor, ha da heul e oa klevet eun huanadenn hag eun difronkadenn - ne helle ket ar paour kêz maouez gwaska ken war he halonad.

A-benn eur pennadig amzer ne oa trouz ebet ken, paneved yud an avelioù o tarhei didruez.

... Neuze e teuas lapous an donvor war-bouez eur barrad avel. Dond a reas da gluda war bord ar prenestr.

Daoust d'an defvalijenn, eh anavezaz Treveur gouelan an donvor, du e ziouaskell ha ken braz e vent. Chom a reas al lapous dispak e ziouaskell evel pa vije bet o hortoz galv ar pôtr yaouank.

Aliez-kenañ e-noa arvestet ouz e nijadenn, fromet hag ankeniet war ar memez tro gand e gaerder hag e grizder. E weled e-noa o vargedi hag o plava a-dôl-trumm a-benn tenna ken digernez ha tra o boued digand ar gouelini arhantet pe ar skreved. Ha skei a rê ganto ken e tehe ar re all diwar e dro. En desped da ze, Treveur a oa bet kreñvoh e vamerez evid e gas, ha sevel a reas ennañ eur hoant direzon - gervel ar gouelan.

Ne oa ket peurechuet e venoz gantañ ma tigoraz ar prenestr gand eur strakadenn. Pennfolli reas e galon. Na braz e oa ! Nag iskiz e lagad rond ha skoelf ! Ennañ e verze oll strobineleou ar bed, ar strobineleou-ze a zouz spered an den dirazo tra ma hoanta e galon dizolei anezo. E melen e lagad e splanne an oll drêzennoù digenvez ha divent, padal, e mab e lagad e spurmante Treveur an islonkou du, kuzet ar goueled anezo trouz lagad mab-den.

Euz a-douez e derzienn e kredas da Dreveur edo al lapous o tostaad outañ. Ken kaled e skoas e galon en e greiz ma 'z eas en e goazez, berr warnañ. Beuzet e oa e gorr en dourhwez. Krozal a rê e alan e don e vruched ha kinnig mouga reas gand ar rohadenn. Klask a reas sevel en e zav da vond beteg ar prenestr a-benn leunia e skevent gand er glan an noz.

Hogen, edo al lapous etrezañ hag e bal. Ouzpenn-ze, daoust pegen kreñv e oa e hoant, ne oa ket evid e zeveni - e zaouarn, hag a oa krog e liñserioù e wele, a ziskrogas diouto nebeud ha nebeud. Trumm ez eas e nerz dioutañ.

A-greiz-pep-kreiz e chomas pep tra a-zav - an orolaj, an avel, hag al lamm-se en e greiz, ken poaniuz, ken enkreuz...

Ha tarza reas ar sklerijenn. Kaer e oa, med kreñv ive. Trellet e oa e zaoulagad ganti. Dispourbella rê anezo par ma helle, ha, souezusat tra ! Edo war an ôd. Tridal a reas gand eul levenez heb he 'far pa welas an trêzennoù ken braz, ken flour o liou. A-hont edo al linenn ha gouzoud a reas e oa deut ar poent evitañ da dizoud anezi. Marteze 'oa hir an hent da vond di, med moarvad e kavje, en eur vond, treset war an trêz, stumm hoaluz an diweuz

ankounac'hêt. Moarvad e tigasje an avel beteg ennañ eun ano bet dizohjet a-veh beza e garet.

Padal, sachet e oe en desped dezañ warzug an dour du, warzug an islonkou ne hell daoulagad mab-den spur-manti ar goueled anezo anez digeri an nor. Rag aze edo an nor. Daoust ha digeri rê war ar bed c'hoantêt gantañ a-geid-all ? Daoust hag-eh e oa an hent nemetañ da dizoud bro e huñvreou ?

Diskredig e oa c'hoaz... pa zigoras an nor drezi heh-unan.

Freuzet e oe an noz gand eur garm skiltruz.

Dres d'ar mare-ze eo e nijas lapous an donvor, uhel en oabl, uhel en noz.

Hag a-denn-askell e skoas etrezeg ar moriou boull, etrezeg an ehonderiou, etrezeg ar Beurbadelez.

KRISTIAN BRISSON.
Gouere 77

DREIST AR MOR BRAZ

IV

Ar Martinik a zo eun enezenn vraz : bez' he-deus tost da naonteg leo hed, el leh ma'z eo an hirra, ha seiz a lehed, el ma'z eo al ledanna.

Ma'z oh berralaneg, arabad deoh mond di. N'eus eno koulz lavared nemed torgennou ha menezioù. N'em-deus gwelet e-barz nemed eun tamm plênenn vihan war vord lenn-vor Fort-de-France, e kreisteiz an enezenn, endro da gêrig Lamentin. E leh all, n'eus ket eun tamm douar kompez. An torgennou a deu beteg ar mor hag a zav tamm-ha-tamm, med buan a-walh, war-zu ar greizenn. Eno, n'eus nemed menezioù sonn ha begeg. En hanter-norz an enezenn, e tu ar zav-heol, eo ema ar menez uhella, ar menez-tan anvet « le mont Pelé » (1500 metr), an hini e-noa distrujet kêr Saint-Pierre er bloaz 1902.

E-kreiz, ez eus menezioù all, ar re a vez greet outo « les Pitons de Carbet ». Ar re-mañ a zo eun tamm izelloh (1200 metr); lod anezo a zo tost da Fort-de-France. Etre ar « mont Pelé » hag int-i, ez eus torgennou uhel (war-dro c'hwèh kant metr). Tud ar vro o-deus anvet anezo « les Mornes » (le Morne rouge; le Gros Morne). Er hreisteiz, ez eus menezioù c'hoaz. Me gred din ez int izelloh eged an torgennou-ze, med, dre ma'z eo sonn o beg ha ma savont koulz lavared diouz ar mor, e vije lavaret ez int kalz uhelloh.

20 DEGRE : HA KRENA GAND AR RIOU I

Marteze e houlennoh diganen bremañ : « Peleh 'ta ema ar Martinik ? » O ! Pell ema ahalenn, 6000 kilometr euz Pariz. Bez' ema tost d'an « équateur », e-touez ar strollad enezen-nou a zo, tost da greiz an Amerik, etre ar mor braz Adianteg,

en tu-mañ, hag ar mor a vez greet outañ mor an « Antilles », pe ar mor « Caraïbes », en tu all. Eno ema e-kreiz ar broiour tomm.

Ha sur eo e vez tomm e-barz. Pa'z on bet enni en taol kenta, eun tamm a-raog Nedeleg, etre ar zeiteg hag an daou warn-ugent a viz kerzu, ha goude, en distro, etre an unneg hag ar bevarzeg a viz genver, e veze peurvuia war an deiz etre seiz degre warn-ugent ha tregont degre. Ha me a lavar deoh an dra-ze a zo tomm dija. Med, beza ma 'ma an enezenn tost d'an « équateur », ne vez ket biskoaz re domm enni. Lavared a reer eno, hag e kredan ez eo gwir, ne zav ket an termometr uheloh eged tregont degre e-doug ar bloaz, war an deiz, hag e-pad an noz, ne ziskenn ket izelloh eged ugent.

Med pa deu dezañ diskenn beteg eno, pegement a glemmou a deu gand tud ar vro : « Pegen yen eo bet an noz-mañ ! Sklaset on bet !, » he-deus lavaret din meur a wech, oh ober van c'hoaz da grena gand ar riu, beza ma vije dija uhel ha tomm an heol, ar plahig yaouank a zerviche din va dijuni da eiz eur; ha pa lavaren dezi e veze bet re domm din-me, e tigare braz he daoulagad; ne helle ket kredi ahanon. Koulskoude, ne reen nemed lavared ar wirionez.

Evidom-ni, Breiziz, ugent degre e-pad an noz a zo re domm. Biskoaz dre amañ ne zav ken uhel-ze an termometr, memez da viz eost. Warnon, em gwele, ne veze nemed al liñser hag e kaven c'hoaz e veze re warnon, hag e ranken lakaad ar « ventilateur » da vond endro.

Med, c'hwi a lavaro din marteze : « Perag 'ta neuze ne vez ket tommoh e-pad an deiz pa vez ken tomm-ze e-pad an noz ? » O ! N'eo nemed abalamour ma vez atao eun tamm avel-vor da zistana an amzer, eun avel hag a deu euz ar gevred, an hini a vez greet outañ e galleg « l'alizé ». An avel-mañ a zo eun êzenn hag a c'hwez heb ehana, skafiv ha flour war ar horv. Just a-walh d'henn lakaad en e êz.

Med pegen pouer e vez an amzer eno ! Biskoaz n'am-eus gwelet e nebleh kemend a umidite. Eun torr-penn eo zoken gedal an dillad da zehi pa vezont gwalhet. Ganen ez eus diou roched nilon hag a walhan bemdez diouz an noz. E Breiz e vezont seh atao en devez war-lerh diouz ar mintin. E Fort-de-France, pa zavan, e vezont c'hoaz ken gleb ha pa'm-beze lakaet anezo da zehi. Evid o zehi da vad, ez eo red din o lakaad dirag ar « ventilateur » pe ar « hlimatiseur » ha tost dezañ zoken.

An avel a ra hemañ o laka da zehi buan.

RADEN SEIZ METR

Gand kemend a umidite n'eo ket estonabl e kouezfe kemend a zour en enezenn, da vihanna en tu troet war-zu ar mor Adlanteg, rag en tu all n'eo ket heñvel. Gouzoud mad a rit dre amañ, lakaom e Brest, e kouez beb bloaz war-dro 1 m. 20 a hlao. An dra-ze a zo nebeud e-kichenn ar pezh a gouez er Martinik : el lodenn vrasa euz an enezenn, e toud an douarou a zo troet war-zu ar mor Adlanteg, e kouez etre daou vetr ha pevar metr dour. N'eus ket a leh neuze da veza estonet pa weler ar pil-dour a gouez kercent ha ma teu eur gaouad. Ha ma sav ken buan ha ken uhel an traou, ez eo, a dra zur, abalamour ma'z eo druz an douar, med ivez abalamour ma chom doureg atao hag abalamour ma vez tommder bepred.

En douarou a zo en tu all, ar re a zo troet war-zu ar mor « Caraïbe », ne gouez ket koulz lavared a hlao hag eno n'eo ket heñvel an traou, tamm ebet. Ar houmoul ne zavont ket uhel a-walh evid mond dreist ar menezioù beteg eno. Abalamour da ze ar geot a chom treud hag ar gwez ne hellont ket ober korv evel en tu all.

Gwechall, el leh ma kouez glao a-leiz, ne oa nemed koajou, koajou braz, koajou don, stank hag uhel ar gwez enno, kalz uheloh ha kalz eunnoh eged dre amañ.

Gwall zouezet e vijeh o weled pegen uhel ha pegen teo e teu ar bambou da veza eno. Dre amañ, a-veh m'o-dez ar re vrasa tri pe bevar metr ha ma vezont teooh eged eur biz-meud. Er Martinik, ez int gwez uhel, uheloh eged ar gwez uhella dre amañ ha ken teo ha morzed eun den braz korvet mad. A-leiz anezo o-dez ouspenn tregont metr. Ha ma welfeh neuze ar radenn, petra a lavarfeh ? A-leiz anezo o-deus c'hwez pe seiz metr hag a zo teooh eged breh eun den kreñv.

E tu ar mor « Caraïbe », er hontrol, n'eus koulz lavared netra. Eno, ne weler nemed douar leton, treud ar geot warnañ, hag, amañ hag a-hont, eur bod-spern bennag pe blant dreineg all, re hag a hell herzel ouz ar zehor.

An avel, henn lavaret am-eus dija, a vez peurvuia, eun êzenn vad ha flour, med dond a ra dezañ ivez a-wechou, etre miz even ha miz du, pa vez eun tammig tommoh an amzer ha pa deu eun tammig muioh a hlao, trei a-greiz-toud en eun avel foll, ken foll ma laka da zavel korventennoù ken spontuz ma pilont ar gwez braz, ma tiskaront an tiez, ma lakaont eun dour-beuz skrijuz da zond war doud an douarou kompez, ken skrijuz ha ma kaver a-wechou bagou braz war an douar-labour. Neuze an enezenn a vez kentoh eun ivern eged eur baradoz.

Ar Martinik a zo c'hoaz pell diouz an Amerik hag a oe kavet koulskoude gand Kristof Colomb, eun tamm diwezatoh eged homañ, d'ar bemzeg a viz even 1502, en e bederved beaj.

Goude e ranker gortoz ouspenn kant vloaz, beteg ar bloaz 1635, a-raog gweled tud o tond euz bro Frañs da glask chom eno, hag an enezenn ne oa staget ouz on bro nemed er bloaz 1674, d'ar poent ma oa roue Louis XIV.

NEBEUTOH-NEBEUTA A GORZ-SVKR

Adaleg ar bloaz 1502 beteg an naontegved kantved ha zoken e-pad hanterenn genta hemañ, buhez tud an enezenn ne oa ket tost dezi beza na brao nag êz. Da genta ar re a oa eno a-raog ma erruas Kristof Colomb hag e vartoloded a oa bet distrujet kazimant toud gand ar re-mañ ha gand ar Spagnoled a deuas war o lerb.

Goude, e-pad ar zeitegved kantved, ha beteg ar bloaz 1816, keit ha ma padas ar brezelioù etre Bro-Zaoz hag ar Frañs, ar re o-doa kemeret o flas a oe d'o zro mahagnet meur a wech gand ar Zaozon hag ar Hollandiz, ken aliez ha ma teuas ar re-mañ da veza ar vistri en enezenn.

Med, ouspenn, beteg ar bloaz 1848, ar bevrvasa euz an dud enni a oa sklavourien du, digaset di en desped dezo euz an Afrik, gwerzet ha lakaet da labourad war-dro ar horz-sukr, en atanchou braz.

Rag gwella peadra he-doa an enezenn d'ar poent-se, hag a chomas ar gwella ken na oe kavet, e-pad brezelioù an Napoléon koz, ar mod da denna sukr euz ar beterebez, eo ar horz-sukr. Med neuze, kerkent, talvoudegezh ar re-mañ a gouezas koulz lavared da netra.

Bremañ e vez laketa c'hoaz eun tamm bennag a gorz, dreist-oll evid ober rom, med n'eus ket ken kalz a zouar dindanno : kant vloaz zo, e oa 40.000 devez arad; seiz vloaz zo, ne oa ket ken nemed c'hwezeg mil, hag hizio ez eus nebeutoh c'hoaz.

En o flas e vez lakaet bremañ bananez hag ananaz. Nemed ar re-mañ ne vez ket ingal a-walh ar gounid ganto, abalamour ma teu dezo aliez beza distrujet gand ar gwall gorventennoù.

An ananaz koulskoude a gemer tamm-ha-tamm muioh a blas, med dre ma chom re uhel o friz ez eo diêz kaoud gwerz dezo. Ma ne vije ket skoaziet ar re a blant anezo gand on gouarnamant, ne vijent ket gouest da genderhel, hag an dra-mañ a goust ker deom-ni.

An dra ma tenn an enezenn ar muia a arhant outañ eo an tourism. Bez' ez eus a-leiz a oteliou braz. An hini brasa, an otel « méridien », a zo ennañ tri hant seiz kambr, med pell ema euz Fort-de France, seiz kilometr ha tregont, war vord ar mor. Ar brasa goude, ar « Martinik Hilton » a zo e kêr, war vord ar mor ivez, med n'ez eus ennañ nemed seiz ugent kambr. Eun all an « Diamond Rock », hag a zo ennañ pemp kambr ha c'hweh-ugent a zo ivez tri gilometr ha tregont euz Fort-de-France. Seiz otel oll ha tregont a zo c'hoaz, kalz bihannoh, med toud nêz hag êzant vad enno.

LEUN A AMERIKANED

An oteliou-ze a vez atao leun a dud, enno dreist-oll tud euz Stadou-Unanet an Amerik hag euz ar Hanada. Pa'z on eet euz Fort-de-France da New-York, war bevar hant hanter a oa en avion, euz an Europ, ne oam nemed tri, diou blah yaouank ha me. Ar re all a oa oll Amerikaned ha Kanadianed, bet er Martinik o klask an heol hag an tommder e-pad o vakañsou.

An tourism ne baouez ket bremañ da vond war gresk ha marteze eo eñ eo a roio labour d'eul lodenn euz ar re yaouank a zo hizio dilabour ar bevrvasa anezo.

Med memez gand an tourism o vond mad, e kredan e kousto ker atao an enezenn d'on bro. Re a dud zo enni, re nebeud a zouar-labour, re nebeud a zanvez ha re nebeud a uzinou evid ma vije gouest da vond a-walh war wellaad outi he-unan.

Er Martinik, ar bevrvasa euz an dud, dreist-oll ar re zu, a zo tud hegarad ha laouen. Plijoud a ra dezo a-leiz kana ha dañsal, en otel e oan ennañ e veze dañsou koulz lavared bemdez diouz an noz. Bep seurt dañsou o-deus; meur a hini anezo a zo dañsou koz digaset gwechall euz an Afrik gand ar sklavourien. Med unan a zo hag a garont muioh eged ar re all, unan hag a zo bet savet er vro hag a vez greet outi « la biguine ».

Gwechall, ar vorianed a veze gwisket disheñvel diouz ar re wenn. Bremañ e vez gwisket heñvel an oll. Peurvuia ne vez ket kalz a dra war an den, eur roched mañchou-berr hag eur bragou lien tano, gand ar wazed, eur zae skañv gand ar merhed.

Med rankoud a reer lavared an dra-mañ n'eo ket gwir evid eul lodenn euz ar baotred hag ar merhed yaouank, ar re anezo a vez o labourad er bankou pe re postou pe en tiez a gomerz pe er skolioù... Souezuz eo gweled pegen faro e vez gwisket ar re wenn. Koulskoude e weler c'hoaz aliez a-walh, er marahadou hag en overenn, merhed du en-oad gwisket e-giz

gwechall, eun espez turban ganto endro d'o fenn, ha gand eur horsaj brodet hag eul lostenn hir, flamm he liou.

EUR BANNE DOUR-KRAOÑ

Pa gemeran va dijuni, da eiz eur, e vez dija uhel an heol; an er klouar a deu gantañ c'hwez-vad toud ar fleur a zo a-vernioù dirazon hag al laboused a gan heb ehan endro din.

Er mintin kenta, astennet er-mêz, war va hador-hir, en disheol dindan ar wezenn-graoñ-kokoz vihan a zo dirag va hambr, he brankou hir ha ledan, heñvel-poch ouz re eur wezenn-balmez, evel eur volz, tri pe bevar metr a-zioh va fenn, pa welan enni eur bern kraoñ, dare da weled, e sav ar c'hoant ganen da dañva unan anezo.

Eur mevel yaouank a zo eno e-kichenn, o touza geot al liorz. Henn lavared a ran dezañ hag eñ, dioustu, evid ober plijadur din, a skrimp beteg eno. Eun taol falz hag ar graoñenn a gouez d'an traoñ. Eun taol falz all war he beg da ober eun toull e-barz hag e kinnig anezi din. « Kemerit, aotrou, emezañ; n'ho-peus bremañ nemed staga ho penn outi. Ar graoñenn eo ar gwella gwerenn ! » Eur werenn eo sur, eur werenn vraz, ken braz ha va fenn.

Leun eo a zour; quspenn eun hanter litrad, kredabl. Ha dour mad. Peseurt blaz he-deus ? a houlennoh diganen marteze. Eur blaz diêz a-walh lavared just petra eo. Dous ? Treñk ? Da genta e vijen tentet da lavared ez eo disaour eun tamm. Med, goude eul lonkad pe zaou, e kaver dezañ evel eur blaz mel, eun tammig treñk, mad-kenañ, hag ar pez a zo gweloh, n'eus netra par dezañ da derri ar zehed.

Evet ganen dour ar graoñenn, emeon e tro neuze da zaouri va dijuni e-giz ma'z eo dleet, dirag ar gwel ken kaer a zo dirazon.

Goude, war-dro nav eur, e kuitaan an otel evid mond, war va zroad, beteg ti va mignoned. Ober a ran eno eur bourmenadenn dispar. Mond a ran gand an hent goustadig, rag ar zao a zo tenn ha tomm an heol. Dre ma'z an gand an hent striz, ez on, penn-da-benn, ken estlammet hag eur bugel pa wel eun dra evid ar wech kanta. Rag nevez eo evidon kement tra a welan amañ : ar fleur d'ar poent-mañ ar bloaz, ar gwez, al laboused, an tiez, an douar ruz, ar menezioù glaz, du hont, sonn o beg dirazon, an dud. Mond a ran tamm-ha-tamm war-zu neh ar zao. Tremen a ran dirag ti penn rener skol-veur Fort-de-France, dirag hini ar prefed, dirag post ar harter. Er Frañs, an tiez-se a vez atao e kreiskêr, stag ouz an

tiez all. Amañ emaint koulz a-ared war ar mêz, an daou genta pell diouz an hent, pep hini en eul liorz vraz, e-touez ar gwez glaz hag ar fleur. An trede a zo eun tamm tostoh d'an hent, med endro dezañ ne vank ket ivez nag ar gwez nag ar fleur.

En daou hent bihan am-eus da heulia goude, em-eus, evid ar wech kenta en buhez, dirag va daoulagad, plant bananez er jardinoù. Lakaom ez eo ar plant-se ken uhel hag ar maiz en on bro, med gand eur gorzenn peder pe bemp gwech teooh, heb eun delienn warni, ha war ar beg, eur bochad deliou hir ha ledan. Peb delienn he-deus eur metr hanter hed pe zaou ha tregont pe zaou-ugent santimet, lehed. Gand diou zelienn e vijed gouest da wiska eun den. Ar frouez a deu e-touez an deliou, hanter-kant marteze, an eil a-zioh eben, war eun tamm brank pleget war-zu an douar, stok-ha-stok, evel en o bod ar greun rezin.

Gweled a ran c'hoaz frouez all a bep seurt, lod hir evel kokombrez, lod ront evel sitrouillez, lod glaz-gwer, lod glaz-du, med ne hellan ket gouzoud petra int, rag n'en em gav ganen den ebed d'henn lavared din.

E ti va mignoned n'eus den ebed c'hoaz war-zao. Perag ne 'z afen ket d'ar jardin, d'o gedal da zavel, da en em astenn war eur gador-hir, dindan ar gwez ? Biskoaz er gêr, ne vije deuet c'hoant din d'henn ober. Med amañ n'eo ket heñvel an traoù : ar pennad-hent am-eus greet hag an tommder a zo a-walh d'am lakaad da veza eun tamm labaskenn hizio. Hag e rankan anzav n'eo ket tost din kaoud an keuz na mez oh en em leuskel evel-se, hag ouspenn, e-pad ma choman eno, em-eus tro da weled eun dra dispar.

LABOUSIGOU HEB KORV NA LOST

Deg pe zaouzeg metr diouzin e-kreiz ar jardin, ez eus eun wezenn izel med ledan he brankou (ankounac'haet am-eus heh ano; eur « frangipanier » marteze). Warni ez eus bernioù fleur euz ar re gaerra; o furm a zo hini eur gapusinenn, med o liou a zo kalz disheñvel : o deil-bleuñv a zo gwenn ha roz, tost da veza ruz war o bord, hag ez int ken tano ha ken fin ma vez koulz lavared gwelet drezo.

A-benn eur pennad, em-eus ar joa da weled o tond a-greiz-toud endro d'ar wezenn eur vandenn labousedigou, hanter-kant da nebeuta, ken bihan ha ma'z int a-veh brasoh eged eur wenanenn. E galleg e vez greet outo « des oiseaux-mouches » pe « des colibris ». Kalz int bihannoh eged al laouenanig dre amañ. N'int na keid na ken teo hag eñ, med kalz muioh a vuhez a zo enno.

Peseurt liou o-deus ? Ne hellan ket mad henn lavared deoh. Perag ? N'em-eus ket gwelet unan anezo o chom heb nijal. Me a gred o-deus plu a bep seurt liou. Kavoud a ra din o-deus re ruz, re hlaz ha re velen. Med n'eus gouest den ebed d'henn lavared sur, rag ne weler anezo nemed o nijal. Ne chomont ket a-zav an disterra pennad. Eun dra souezuz eo o gweled. Lakait e vezont dirazoh evel ar gwenan pa vezont o klask o boued. En eun taol-kont emaint dirazoh endro d'ar wezenn. Ne chomont ket warni. Pep hini anezo a en em laka da nijal dirag eur fleurenn, er memez plas, eun tamm evel eun « hélicoptère » pa vez a-zioh an dour o klask savetei eun den. O diouaskell a dro neuze ken buan ha ma ne weler anezo nemed evel eun espez rodig ha ne baouez ket da drei. Dre ar rodig-se, ne weler na penn na korv na lost, na liou na furm. Ne weler netra nemed ar beg hir ha moan evel eun nadoz vihan a blantont a-greiz-toud e kreizenn ar fleurenn da denna ar sug outi. Ha kerkent ez eont dirag eur fleurenn all.

An abadenn endro d'ar wezenn ne bad ket pell; tri pe bevar munut, hag e welit anezo o vond kuit, toud asamblez, ken buan ha ma'z int deuet, evel luhed.

Lavared a reer e teuont atao d'ar memez poent, just a-raog ma vez re domm an heol, pa zigor ar fleurenn da zistaol he sug.

Med c'hwî a chom pell c'hoaz da zelled ouz ar wezenn, souezet ha trist eun tamm, o weled n'ema ket ken aze dirazoh al labousedigou-ze, ken bihan, ken brao, a zo enno kement a vuhez. Eun dra burzuduz a zo tremenet aze dirazoh. Eur wech en ho puhez ho-peus gwelet braoigou beo-buhezeg hag ho-peus mall adarre en devez war-lerh.

**Da veza kendalhet.
YVES MIOSSEC.**

Brezoneg vez desket ive er skol.

**DIWAR EUN ENKLASK
GRÊT E MIZ DU, MIZ KERZU 1977.**

— « Ha Joël, daoust hag e oar brezoneg ? »

— « O, ne vefe ket gwerzet ! » he-deus respontet din e vamm.
« Hag ouspenn, desket vez brezoneg er skol bremañ. »

Setu ar pezh a ziskouez sklâr ive eun enklask grêt er miziou Du ha Kerzu 1977 e skolioù prevez Penn-ar-Bed.

Eun enklask grêt e penn-kenta 1967 a ziskoueze e oa 250 mestr (en derez kenta hag er skolioù-mamm) o teski brezoneg en o hlasou, e-pad an amzer-skol implijet da zigeri ar vugale war ar vuez (Activités d'éveil). Hen ober a reont pe eur wech beb an amzer, pe eur wech pe ziu er zizunvez, pe c'hoaz eun nebeud munutennou bemdez. Hag an dra-ze gand 6780 a vugale.

E fin 1977, eun eil enklask a ziskoueze e oa kresket mad an niver-ze. Hag e miz genver 1978 e vefe 335 mestr oh implij brezoneg er skolioù-mamm hag e skolioù ar henta derez (ar pezh a ree 30 % ouspenn) hag evid ar vugale, 8220 ez eus outo o teski brezoneg bremañ (40 % muioh egad e 76).

Ha war-raog ez a atao an traou, rag e dibenn ar bloaz-mañ (77-78) e heller konta, sur, ouspenn 9000 a vugale o teski brezoneg er skol.

**PENOAZ VEZ DESKET BREZONEG
E-PAD AMZER AN " ACTIVITÉS D'ÉVEIL " ?**

Eul lodenn vad euz ar vistri a gelenn brezoneg e-pad 5 pe 10 munut bemdez en eur implij al leor « 5 munut brezoneg bemdez »; lod all a gemer eun hanter-eur bep sizun evid ar brezoneg. Ha lod all a ra gand ar brezoneg eur wech beb an amzer en eur implij kanaouennou, rimadellou, barzonegou a ya gand danvezioù-studi an « activités d'éveil », pe c'hoaz pa en em gav ar vugale da implij galleg war stumm brezoneg (« bretonnismes »). D'am zoñj, setu ar gwella doare da ober... m'on-eus c'hoant da lakaad an diou yez da dalvezoud evid ar vugale.

Mod-se, tamm-ha-tamm, pep tra a vez grêt er hlas, a vo blaz an diou yez gantañ. Kefveria ar brezoneg gand ar galleg a laka ar spered da vond euz eur yez d'eben hag êsoch vo d'ar bugel deski yezou all diwezatah.

Setu amañ eun daolenn, hag a ziskouez penaoz eo kresket niver ar vistri hag hini ar vugale etre 1976 ha 1978 :

NIVER AR VUGALE

	5 munut bemdez		Eur wech pe ziu bep sizun		Gwech an amzer		Heb respont skliër	
	1976	1978	1976	1978	1976	1978	1976	1978
Skoliou-mamm	690	846	265	207	580	500	315	
C.P.	330	430	170	99	300	400	160	
C.E.	640	970	525	217	790	620	310	
C.M.	920	1082	600	583	980	750	530	
Etre toud	2570	3341	1560	1156	2650	2270	1315	

Ouspenn, ez eus daou glas anvet « de perfectionnement ». Setu, niver ar vugale a zesk eun tamm brezoneg, a ya beteg 8200 hag ospenn.

**NIVER AR HLASOU
LEH VEZ DESKET BREZONEG (1978)**

	5 munut bemdez	Eur wech pe ziu bep sizun	Gwech an amzer	Heb respont skliër
Skoliou-mamm	28	6	17	13
C.P.	20	4	20	8
C.E.	38	6	27	14
C.M.	43	23	33	24
Klasou de perfectionnement	1			1
Etre toud	130	39	97	60

326 klas en oll... A-bouez eo gweled pegement e-neus kresket etre 76 ha 78 niver ar vistri a gelenn brezoneg bemdez en o hlasou. Ouspenn, e 1976, edo an oll glasou strewet er vro, hag e 78, ez eus war-dro 20 skol e leh e vez grêt brezoneg en oll glasou pe kazimant.

Evel e 76, al lodenn vrasa euz ar vistri a lavar pegen dedennet eo ar vugale gand ar yez. Setu a-walh da brederia ha da labourad evid ar sevenadur hag ar yez, pa'z eo pal ar skol digeri spered ar bugel war ar béd a zo endro dezañ.

Med petra zoñj ar vistri war ar poent-se ?

Amañ e laront penaoz e plij d'ar vugale kaozeal eur yez all ospenn ar galleg, eur yez implijet gand o zud. A-hont, ar vugale eo a houlenn eun eurvez-skol vrezoneg, ma c'hoarvez gand ar mestr he dizoñjal, Perag ? Marteze peogwir n'eo ket eun danvez-skol evel ar re all, med beo-birvidig en diavêz euz ar skol, hag a-dra-zur, peogwir ar yez a hell displega eun dra bennag donnoh e kalon ar vugale... daoust ma ne hellont ket c'hoaz diskleria perag... eun doare nevez da rei ano d'an dud ha d'an traou... eun doare da gompren an dud ha da gaozeal ganto, savet a-nebeudou a-hed an amzer... « Liou an amzer ha spered an dud. »

Laret ez eo bet ive penaoz ez eo « gwelet mad bugale zo gand o hamaladed... dre ma'z int maout war ar brezoneg... pa za disterroh al labour-skol ganto a-hend-all ! » (Pleiben)

KOLL AMZER 7

Eur yez a liammou eo, eur yez a blijadur : « *Eur blijadur eo evid ar vrezonegerien yaouank diskouez laouen d'o hamaladed, penaoz e ouezont brao a-walh, ar yez komzet gand lod euz o zud !* » (Kastell-Nevez ar Faou).

Dre vraz, ken dedennet eo ar gerent hag o bugale, memez er hêriou (Brest, Kemper, Lezneven) : « *Plijoud 'ra ar brezoneg d'ar vugale. Hag o zud ive a zo laouen-braz* ». (Brest)

Er memez mod e lavar renerez eur skol, kostez Lezneven : « *Ar gentel vrezoneg a blij d'ar vugale. Ha n'am-eus klevet rebech ebed digand o zud. Ha lod euz ar vugale a glask kaozeal brezoneg er gêr.* »

Skrivet eo bet ive : « *Pemp munut brezoneg bemdez a zo munutennou a dalvoudegez vraz en devez-skol. Hag ar gerent a zo ive ken laouen hag o bugale.* » (Gwiseni).

Deski brezoneg a zo « *eun doare da zigeri spered ha kalon ar vugale, laouen da kaozeal brezoneg gand o zud ha dirag o hamaladed.* » (Lezneven).

Eveljust, aon a vez eun tammig, hag a-wechou, e vez tud a-eneb. Med nebeud int. Klevet vez gand lod euz an dud : « *ar brezoneg ne zervij da netra !* » « *Lesket 'm-eus ar brezoneg a-gostez, rag lod euz an dud a zo a-eneb. Deski brezoneg a zo koll amzer.* » (Pleiben). « *Ar brezoneg, nann; ar galleg pe zaonneg, ya !* » a houlenn stard lod all. (Landerne, Lanniliz, Daoulas).

Eun deiz, emichañs, e komprenint penaoz kaozeal galleg ha brezoneg a zo eun doare beva, hag eun doare a-bouez, evid digeri spered ha kalon ar vugale, war bep tra a hellint deski er skol... Mad-kenañ eo kaozeal galleg... saozneg ive marteze ! Med ar brezoneg a ro tro deom da gomz en eun doare all, hag a zo tostoh ouz or spered. Tuet om zoken da implij a-liez a-walh e galleg stummou ar brezoneg, heb gouzoud deom. Ha traou zo marteze ha ne hellont beza lavaret nemed e brezoneg, pe da vihanna, a vez lavaret e brezoneg en eun doare disheñvel.

ANNA-MARI ARZUR.

Notenn gand rener Brud Nevez : Eur gazetenn bedagogiel a-bouez a vez moulet gand ar Bleun Brug, ERO NEVEZ heh ano. 10 lur e koust ar houmament-bloaz. Goulenn anezi digand « BLEUN BRUG, 5 ru Francis Jammes, 29200, Brest ».

Eun tammig chach-bleo diwar-benn eur varnedigez.

Emaon o paouez lenn barnedigez an aotrou Klerg, rener « Barr-Heol » diwar-benn va barzoneg "HOSANNA", ha chom a ran sebezet !

Eveljust, aotre e-neus hemañ da gaoud displejuz va labour, med d'hen louza n'e-neus ket, ha d'am zamall e-gaou nebeutoh c'hoaz.

Gwelom eta asamblez pe ar barzoneg pe e varnedigez eo an hudurra.

Med da genta, en em houlenn a ran, e pe stad edo an aotrou Klerg p'e-neus lennet va barzoneg ? Dallet gand ar gounnar, a dra zur, pegwir n'e-neus ket zoken komprenet anezañ.

Evelse, e peleh e-neus kavet em-eus implijet geriou grêt evid komz euz ar zaout ? « Goloet » a lavar ? Ha neuze ? Peseurt droug ? Pegwir ar ger-ze, e brezoneg mad, ne veze na ne vez morse implijet war ar mêz (e leh m'am-eus bevet pemp-bloaz-war-n-ugent e-touez al loened-korn) evid kôzeal euz an traou-ze. Respet deoh, ar vïoh a vez « kaset d'an taro » hag an taro e-nezo « servichet » anezi... Digarezit ahanon, mez em-eus o rankoud divenn barzonij gand marvaillo ken doñjeruz ! Euz « goloet » n'eus ano ebed. « Goloet » er frazenn a zell ouzom, ne hell lakaad da ruzia, pe da gounnari, nemed tud dezo eun dro-spered gallaoueg, rag, evid ar re-mañ, « goloet » a ro « couverte ». Evelato, poan am-eus o kredi e-nije ranket an aotrou Klerg trei va zammig barzoneg e galleg evid e gompren, ha koulskoude, evid fasia ken groz !...

— « Pa vezan a-bez goloet ganez... » am-eus skrivet. M'am-bije gouezet pegen pismiger kasaüz oa an aotrou Klerg, em-befe bet skrivet : — « Pa vezan a-bez adgoloet ganez... » pa oa em zoñj : Quand je suis par toi entièrement recouverte... e-giz gand eur pallenn, ha netra ken ! Med kredi a rên e oa ar ger « a-bez », o vond da heul « goloet », frêz awalh evid sklerijenna al lennerien a volonteiz vad, rag ne vez morse lavaret, nag e galleg, nag e brezoneg, e vije eur fumellenn bennag « goloet a-bez » ! Awalh e vez dezi, emichañs, beza « goloet », ha n'eus foull-forz pe jomfe dizolo he zroad pe he skouarn, n'ema ket aze ar pal, neketa ?

Me am-eus skrivet « goloet a-bez », setu, onestamant, n'eo ket d'an aotrou Klerg dispartia an daou her-mañ; mar fell dezañ klask laou diwar-benn « goloet », e tlee ober kemend-all diwar-benn « a-bez », ha lavared din petra ' ra ar gerig-se eno !

Med goude m'am-bije skrivet : « Pa vezan goloet ganez... », ne oa ket leh da feuki, lavaret am-eus perag.

Komzom galleg pe vrezoneg, aotrou Klerg, hag e vezo sklêr an traou... dreist-oll pa vezer abeger a vicher. Ne oan ket o hedat meuleudi hepken, med abegou leal. D'an eil, e peleh euz " Hosanna " e-neus lennet va barnet e oa ganen ano euz ar garantez etre ar prijeou tra ken ? Resisoh, etre prijeou kristen, a lavar.

Hag ar re-all, aotrou Klerg ? Me am-eus ive soñjet er re-all, en oll re ha n'int na pried, na kristen, hag a zo ken stank hirio ! N'on ket strizkredennouez, ganen eta oa ano euz ar garantez dre vraz hag euz he burzudou. Karantez ar galon pe karantez ar horv, eur zantimant kaer meurbed ha ne ro ket d'an hini he bev an disterra menoz da veza dizonest; da veza tentet gand ar « zarpant koz » ne lavaran ket, med n'eo ket ar memez tra...

Ha perag e fell d'an aotrou Klerg e welfen-me dirazon, e mare uhella ar garantez, skeudennou a gañv pe fas aonuz an Ankou ?

Or mammou marteze, o-deus gwelet kement-se d'ar poent ma veze grêt dezo bep ploaz rik eur bugel (daou pa veze mad ar bloavez !), dre hourhemenn digernez an Iliz. Ya, siwaz, evelse e oa kont, ha ma ne gredit ket, selaouit !

Va zad-koz e-noa eur breur beleg hag a zo bet pemp-bloaz-ha-tregont person e Lambaol-Gwimilio, tonton Lan a veze grêt anezañ, mab-bihan oa da vrudeta peñseer Bro-Bagan, med an dra-mañ a gontin deoh eur wech-all...

Tonton Lan, eta, a oa kustum d'ober bep ploaz tro e famil. Pa errue e « Kerargouez », e ti e vreur, va zad-koz, e taole eur zell anaoudeg war e c'hoar-gaer, va mamm-goz, hag e lavare ingal dezi : « Diwallit ouz an lvern, Anna, c'hwî eo re ruz ho penn ! » (Eur vaouez, pa veze traou nevez ganti, e veze peurliesia disliv he dremm.) Araog kuitaad, e kave an tu d'ober eur pennad-kaoz gand e vreur ha da hemañ e lavare : « Diwallit Chamar, amañ ' welan ne vez ket grêt an dever ! » Ha diouz an noz, Chamar, torret e reor gand al labour, a ree adarre... e zeve.

Evelse eo deuet va zad war an douar... Eur pennad ehan, mar plij ! Amañ euz va istor e tlean chom a-zav da lavared eun « De Profundis » evid tonton Lan, Doue d'e bardono, panevetañ n'em-bije bet tad ebed ! Setu ne vijen ket bet hirio o stourm ouz an aotrou Klerg diwar-benn ar garantez... Amen !... Mad, dao adarre neuze !

Ped euz merhed-keiz an amzer-ze a zo êt da anaon, dinerzet pe diwadet oh ober « o zro », giz ma vez lavaret ? Poueza ' ran bremañ va geriou, n'em-eus ket skrivet « en eur fluta », evel ar gwized, daoust ha ma 'z eo bet ar ger dindan va fluenn, rag ar mammou paour a veze tennet, e-kreiz o foan, euz o gweleou-kloz, e-leh ma ne helle ket an amiegezh ober he labour, evid beza ledet war eur forhad kolo e-kreiz al leur-zi, ha zoken en tiez pinvidig !

Marteze, diouz an noz, pa zigoueze, eur wech muioh, d'o fried lavared dezo : « Tro amañ » ha netra ouspenn en aon da behi, ya, marteze, ar merzerezed-se a wele awechou, dirag o daoulagad skuiz, skeudennou chatal dre ma oant diskennet er memez renk ganto.

Soñjit, tud vad, va mamm-gaer a oa an driwehved bugel euz eun tiegezh paour ! Eur vaouez ha n'he-deus bet morse an disterra yehed, na siwaz he bugale war he lerb. N'oh ket souezet, emichañs ? He zud a oa re goz da rei buhez, na petra ta !

Med he mamm dezi he-deus grêt he dever beteg ma yeas diganti an heol diwar an treuzou, ha klevet am-eus ar gêzez-koz o konta penaoz eur zulvez-hoañv, goude beza baleet eul leo dindan eun dour-bill-zour da vond d'an overenn-vintin, edo puchet war leurenn iliz Landi, e-touez ar re baour eveljust, (hag e peleh he-dije kavet daou wenneg vak da rei evid eur gador ? Ar hadoriou a oa evid ar re binvidig, mardandoustig !) pa zemplas en he dillad gleb-teil. (An disglavier n'oa ket anavezet c'hoaz tro-amañ.) Kaset oa d'ar gêr hag a-benn an noz oa adarre kresket an dud er « Boderezh ».

Ha pegen diglemmuz oa oh ober evelse he silvidigez ! D'ar re a lavare dezi gand truez : « Ha dougerez adarre, Josefe ? » e responte laouennig : « Da heul Yann e teu e damm. »

Red oa beza « kondisionet » memez tra ! Paour-kêz mamm-goz ! C'hwi ive, kredabl braz, ho-peus gwelet aliez fas an Ankou, pa veze Yann-Bolig, ho pried kristen, oh ober e zevel ! Me avad, a drugare Doue, n'em-eus gwelet morse er mareou-ze, na skeudennou a gañv, nag Ankou, na saout, med taolennou koant ha yahuz, gouest d'am dibrada dreist teñvalijenn ar vuhez, taolennou skedusoh eged Bali Sant Jakez, taolennou ken frealzuz evid ar galon m'o-deus roet din c'hoant da gana ar garantez, ha, digarezit ahanon, ma 'z eo re zidroidell va fluenn.

Setu lakêt ar pik war an i l...

D'ol lennerien bremañ da lavared pehini ahanom on-daou, pe an aotrou Klerg pe Naig Rozmor, a zo ar muia « e-kichen ar blakenn. »

NAIG ROZMOR.

Eur respont all da Varr-Heol c'hoaz...

Aotrou Rener « Barr-Heol » n'on ket sur e talvezje kaer ar boan tabutal gantañ, ken asur e vez bepred en e varnadennou, n'eus forz a betra e vez o renta kont : euz brezoneg, lennegezh, pe istor, euz politikerezh, relijion pe giziou nevez. Hag eur wech bet disklêriet gantañ « ar wirionez », ar re all n'o-deus d'ober nemed plega - ha douja - pe mond d'an diaoul.

Eur respont bennag a gredfen ober evelato da Aotrou Rener « Barr-Heol », war daou pe dri boent. Rag tamall ahanon e-neus greet - e gaou - goude ar pennad am-oa roet d'embann da Vrud Nevez, diwar-benn leor eñvorennoù Herve Lanndiern : « Dreist d'ar gorventenn. » (Gweloud niverenn 15 Brud Nevez).

Tamall ahanon a ra da genta, mar plij, war zigarez m'am-bije bet barnet leor Herve Lanndiern « gand oll droiou eur spered marksour. » Mond a ra buan ganti memestra, rag me gav din n'eo ket red pellaad kalz euz kredennou nag euz sav-boent Aotrou Rener « Barr-Heol », evid kleved kerkent

digantañ e vezer eur « marksour » : tra-walh eo gweled pegen aliez e teu dezañ, pe da lod euz e genlabourerien, teurel ar rebech gand ar re all. Adaleg ma ne vo ket Aotrou Rener « Barr-Heol » a-du ganeoh, emaoñ dioustu e riskl braz e rafe ahanon « eur marksour. » Da hraz Doue, kalz a dud all, ha beleien en o zouez a rankan lavared, o-deus bet ar vadelez da lavared din o-doa bet kavet va barnadenn a-zoare.

Med Aotrou Rener « Barr-Heol » a die beza berr e vemor, moarvad. Lennet e-neus sur mad leor Herve Lanndiern - ahendall ne zivennfe ket anezañ - ha lennet va renta-kont da houde. Ahanta, abegi ahanon a ra dre m'am-eus skrivet e oa « Breiz a-bez o vond da heul ar Rezistañs », arag fin ar brezel dija. « Eneb-gwirionezou » eo a vefe kement-se, ha netra ken. Da weled.

Bez' e oa, evel just, tud (hag en o zouez eun toullad mad euz an otonomisted) hag a gave gwelloc'h kenlabourad gand an Alamanted e-pad ar brezel. Bez' e oa ive tud dizeblant, se zo sklêr. Med daoust ha n'eo ket bet ar Vretoned e-touez ar re genta oh en em lakaad da glask derhel penn d'an Alamanted, hag o vond niverusoh-niverusa dalmad da heul ar Rezistañs ? Kement ha ken bihan ma oa « Breiz a-bez, Breiz-lzel da vihanha, o vond a-du gand paotred ar strouez ha ne oa tamm spi ebed da enebi ouz lano ar mor. » « Breiz a-bez... Lano ar mor... » Ha piou, a gav deoh, eo e-nije kredet skriva « eneb-gwirionezou » seurt-se ? Koueza a ray e viz-meud da Aotrou Rener « Barr-Heol » en e zorn, rag eun testeni eo gand Herve Lanndiern e-unan, Yann Bouessel du Bourg, en e leor eñvorennoù, pajenn 80.

Gwasoh evid se a zo e gwirionez. Rag troet e vije da lavared eo dizonest a-walh Aotrou Rener « Barr-Heol », gouzoud a oar d'an nebeuta konta gevier « dre omision. » Ar stumm e-neus da grenna ar frazennoù diouz e c'hoant, êsoh a ze e vez dezañ da houde lakaad an diskred war ar re all. Hag an diskred a fell dezañ lakaad warnon p'am-bije skrivet « n'eus bet (e fin ar brezel) nemed 10 o veza bet lazat abalamour ma oant otonomisted. » N'o-devo ket a boan lennerien Vrud Nevez, ma sellont endro ouz an n° 15, da weled n'eo tamm ebed an dra-ze eo am-oa skrivet, ha n'e-neus dalhet Aotrou Rener « Barr-Heol » nemed ar pezh a gare euz va frazenn, en eur droha anezi dre an daou benn. Rag, ma ne oa bet « nemed 10 » o veza bet lazat war an taol, heb prosez na netra, em-oa skrivet mad e oa « diwar 200 », ar re all o veza bet laketa d'ar maro diwar abegou all, hag e lavaren pere. N'eo ket diêz gweled n'eo tamm ebed ar memestra, hag e cheñch ster ar frazenn penn-da-benn, diouz ma vez lennet war he hed, pe diouz ma vez krennet evel m'eo bet graet e-barz « Barr-Heol ».

N'eo ket toud c'hoaz. « Sabatuet » eo bet Aotrou Rener « Barr-Heol » o weled eur gelaouenn vrezonег evel homañ o rei bod da skridou evel va hini. Me eo a zo sebedennet - hag estregeton a zo - o weled anezañ o skriva kemend-all. Neuze, war zigarez ma skriver e brezonег, ne vije ket droed ken da zisplega mennoziou ha ne vijent ket diouz krad Aotrou Rener « Barr-Heol » ? N'eo ket mezuz, evelato - ar hontrol an hini a vefe kentoh - skriva ne vezer tamm ebed a-du gand ar re a vez hirio bepred o veuli « ar vreudeuriez-vrezel » a oa bet skoulmet etre Bretoned 'zo hag an Alamanted etre 1940 ha 1944.

Ra lavaro deom kentoh Aotrou Rener « Barr-Heol » hag-efñ ema efñ e *gwirionez* a-du gand ar re, evel H. Lanndiern, a embann e chomont int a-du « gand ar re o-doa lakaet ar stern en-dro d'o horv evid savetei ar vro hag he fobl en eur c'hoari gand an Alamanted » ? Ra lavaro deom ive, war ar memez tro, hag-efñ eo bet eun dra vad sevel ar Bezen Perrot, evid ober al labour vil e-neus greet, pa oa deuet e izili, gwisket ganto livez an Alamanted, da veza - evel a skriv Herve Lanndiern bepred - « seurt archerien evid redeg war-lerh » ar Vretoned all a oa euz « paotred ar strouez », hag a oa int o klask bounta er-mêz ar zoudarded estrañjour a oa o waska o bro ?

N'in ket pelloh. Gouzoud mad a-walh a ran emañ o komz euz eur mare hag a zo bet unan deuz ar re drubuilleta. Ar pez a zo da houzoud nemedken avad, eo hag-efñ e-neus an Emzao heuillet er mareou-ze ar gwella politikerez a helle ober. Evidon-me, e lavaran nann. Hag Aotrou Rener « Barr-Heol » ?

J. RANNOU

Y. MIOSSEC ER STADOU-UNANET : eul lagad lemm hag eun tamm fent

Y. Miossec a zo digouezet dezañ mond d'ober eun droiad d'ar Stadou-Unanet. Hag e-neus digaset gantañ d'ar gêr, evid on flijadur deom-ni chomet e kom an oaled, eun eostad founnuz a ehvoren-nou. Kontet e-noa dija e niverennou euz BRUD NEVEZ penaoz e oa tremenet e nijadenn evid mond keid-all. Bremañ e lavar deom petra e-neus gwelet ha petra zo c'hoarvezet gantañ.

Eun avañtur eo bet e veaj, e gwirionez. Y. Miossec, daoust dezañ da veza prest da baka e zag-vloaz-ha-tri-ugent, n'eo ket chomet da demal dirag ar skuizderiou, ha maruze an dahjeriou, a oa ouz e hortoz. Dibabet e-noa mond gand daou vignon da weled dam euz Parkou Broadel an USA, ken brudet dre ar bed. Goude beza feurmet eun oto e Denver, e reas hent e-pad ouspenn eur miz dre dachennou kaer-dreist, garo evelato, gouez, skarmilet gand an heel bero.

Douget eo bet, evel ma lavar, en eur bed all. Treuzet e-neus ar Menezio Rohelleg (Rocky Mountains) chomet eo bet a-zav dirag fraill spontuz ar Holorado, diskennet eo bet e Traonienn ar Maro. Nag a draou burzuduz o-deus lakaet anezañ da jom mantret : tiez, paleziou, savet gwechall gand an Indianed dindan an douar, pe hoaz a-barz keioiu dindan ar rehier, gwez sekoia dezo ouspenn kant metr uhelder, bizoned o peuri e Park Yellowstone, e-leh ma strink stivel-lou dour zomm el lae ingal a vare da vare.

Ema leor Yves Miossec : « Eur veaj e Stadou-Unanet an Amerik (1978) » oh ober n° 9 ar gelaouenn « Studi », embannet gand kevrenn gettieg Skol-Vour Vrest hag ar CRDP. Goullenn al leor evid 15 lur nemedken digand ar CDRP, 82, rue d'Antrain, e Roazon.

Bet e-neus bet darempredou gand an dud o veva er vro. Euz Las-Vegas, kêr ar hoarieren eo tehet buan kuit. Amzer e-neus bet da dremen eun nebeud deveziou e San-Francisco, e Disneyland, e Salt Lake City, kêr wras ar Vormoned. Ha nag a draou all hoaz !

Al leor-ze a lenner penn-da-benn heb skuizder ebed. Gand eul lagad lemm hag eun tamm fent awechou, e oar Y. Miossec dibab ha liva an taolennou dedennusa. Bepred e kaver amañ emzalh eun den kizidig dirag ar bed.

Talvoudgeuz an danevell a zeu ivez diouz ar yez ma ra ganti ar skrivagner, eur yez didro, simpl, eeun atao, rag Y. Miossec, gimidig a Wiklan ha savet war ar mêz, a oar petra eo brezonег mad. Dond a ra a-benn da zisplega kement tra heb mond da glask troiou-lavar kamm ha geriou dianav d'an oil. Kemer a ra ar brezonег evel m'emañ, evel ma vez komzet er parrezioù tost d'ar Penze. Diskouez a ra penaoz e hell eur yez pobleg beza unan lenneget.

Salv e tigouezo dastumad ehvorennoù beaj Y. Miossec etre daouarn kement hini a lak e boan da zeski brezonег.

P.M. MEVEL

Ma n'ho-peus ket prenet c'hoaz

Karantez ha Karantez

GAND Naig Rozmor

setu amañ pezh e-neus skrivet A.T. er gelaouenn
« Dihun-Breiz » :

« N'on tamm ebed troet gand al leoriou barzonegou, ha ne daolan ket eur zell e-barz... Lennet am-eus « Karantez ha Karantez » heb ehan. N'eo ket plijadur hebken am-eus kavet ennañ, eun dra ouspenn, eun uhelled spered. Lenn hag adlenn am-eus graet, ha seul vui e lennen, seul vui e kaven kaer... Marteze, gras da Naig Rozmor, e lennin barzonegou bremañ... Nann, n'on ket troet gand barzonegou, koulskoude, eh alian lennerien « Breiz » da breña al leor bihan mañ... »

18 LUR + 2,75 LUR MIZOU-KAS
C.C.P. P.M. MEVEL 1499-55 RENNES

EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ

Evid studi pe kelenn ar yez :

* **KOMZOM, LENNOM HA SKRIVOM BREZONEG,**
gand J. Tricolore

Diou levrenn : Kenta lodenn - Eil lodenn	pephini :	25	F
Diou bladenn da heul al lodenn genta (KLT)	24 ha	28,50	F
Eur gasetennig e brezoneg Leon, da heul an eil levrenn		40	F
Evid Bro-Wened : eur gasetennig evid al lodenn genta		30	F

* **AR BREZONEG DRE RADIO,**
LE BRETON PAR LES ONDES, gand V. Sèité

Daou levr :

Kenta levr, (evid ar re a zo o kregi gand ar studi)	17,50	F	
Eil levr (eil bloavezh)	19,50	F	
Eur gasetennig da heul peb levr	pephini :	30	F

* **Al levriou-ze eo a vez implijet gand ar Hentellou dre lizer-mañ :**

- **Levriou J. Tricolore :** Kentellou dre Lizer Skol ar Merher, A. Merser,
6, ru Beaumarchais, 29200 Brest

- **Levriou V. Sèité :** Skol dre lizer, V. Sèité, Ti-Carré, 29150 Kastellin

Da veza goulennet en oll staliou-levriou pe digand :

EMGLEO BREIZ, B.P. 17, - 29266 Brest Cedex
C.C.P. EMGLEO BREIZ, 1649-07 U Rennes

**Meur a bennad a vo kavet da lenn en niverenn-
mañ euz Brud Nevez, ha dreist-oll :**

- eun danevell a varzoniez gand Kristian Brisson :
ar skrid-mañ eo e-noa talvezet dezañ reseo e 1977
kenta Priz Per Trepos digand FR3.
- eur studiadenn gand Anna-Mari Arzur diwar-
benn kelennadurez ar brezoneg er skoliou libr,
hag al labour a ra enno ar Bleun-Brug.
- daou respont da bennadou bet embannet diwar-
benn Brud Nevez e-barz ar gelaouenn « Barr-
Heol » : ha peadra a zo da veza feuket gand
barzonegou Naig Rozmor ? Ha mond a-du gand
an Alamanted a oa d'ober e-pad ar brezel
diweza ?

Plusieurs contributions intéressantes au sommaire
de ce numéro de Brud Nevez, et notamment :

- « lapous an donvor », le poème-nouvelle qui valut
à Kristian Brisson d'obtenir en 1977 le premier
prix « P. Trepos » décerné par FR3-Bretagne.
- une étude d'Anna-Mari Arzur sur l'enseignement
du breton dans les établissements privés, et
l'action pédagogique menée dans ces écoles par le
Bleun-Brug.
- deux réponses à des critiques de Brud Nevez
parues dans la revue « Barr-Heol » : les poèmes
de Naig Rozmor sont-ils choquants ? Fallait-il
prendre le parti de l'Allemagne pendant la
dernière guerre ?